

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Va gwreg ha va mevelig

Me eo sotañ Yannig 'zo bet biskoazh er bed, 'zo bet biskoazh er bed
'Zo paeañ mevelig da gousket gant va gwreg.

Roum ... falaridondène, Gé ... chach a c'har a drev

Va gwreg ha va mevelig o devez kig-ha-farz
Ha me gant an dour berv gwalc'h et ar sac'h e-barzh.

Va gwreg ha va mevelig o daou o c'horro 'r saout
Ha me c'hoant din mont ivez ac'hann 'vit mont d'o c'haout

Va gwreg ha va mevelig o daou o c'hwennat kerc'h
Ha me barzh er parkeier o redek war o lerc'h.

Va gwreg ha va mevelig o daou d'ar foar a bell
Ha me rank chom er gear da luskell ar c'havell

Va gwreg ha va mevelig o daou memes gwele
Ha me yoa war ar bank ha c'hoant din mont ivez

Ha pa oan aet d'hon gwele tommet ganen va flas
Ha me rank dont er maez da reiñ plas d'ar mevel bras

Va gwreg ha va mevelig oc'h ober bugale
Ha me ar paour kaez Yannig red din da sevel n'he

Setu aze evit petra arabat eo fortunañ, arabat eo fortunañ

Autre ritournelle :
Verduretig dondène, verdure dondé